



HAL
open science

TREUZKAS PE MEMOR ?

Myriam Guillevic

► **To cite this version:**

| Myriam Guillevic. TREUZKAS PE MEMOR?. Hor Yezh, 2022, 306. hal-03694232

HAL Id: hal-03694232

<https://hal.science/hal-03694232>

Submitted on 13 Jun 2022

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - ShareAlike 4.0 International License

TREUZKAS PE MEMOR ?

Myriam GUILLEVIC

Pa vez labouret àr al lennegezh dre gomz pe àr an doareioù da vevañ a za ag an amzer gozh (tisavouriezh, sonerezh, dañs...) e tleomp lenn pennadoù skrivet e galleg, e saozneg pe e brezhoneg. Hag ar ger «tradition» hag a vez implijet koulz e galleg hag e saozneg a zo troet e brezhoneg get ar ger «hengoun». Mes a-dreñv pep ger, pelloc'h doc'h an droidigezh, eh eus ur ster hag an daou c'her-se, *tradition* hag *hengoun* ne lâront ket memes tra.

Sellomp e penn kentañ petra zo kuzhet a-dreñv ar ger *tradition*, e-raok studial ar ger *hengoun*.

TRADITION

Ar ger *tradition* a zo e orin er ger latin «traditio», ar pezh a sinifi «treuzkas». E ster kentañ e galleg a oa degasadenn. Goude-se en deus kemeret ur ster relijiel evit komz ag un doktrin a vez treuzkaset a dud fidel da dud fidel. Ar ster-se eo an hani a gaver er geriadur Grégoire Rostrenen (1732) :

Traditions Apostoliques : Qelennadurez hep scrid a-berz an Æbestel, eus ar pezh o deus desqet gad hon Salver, pe eus ar pezh en deus enspiret ar spered santel dézo, pehini o deus desqet gan-dho ar re a vevé en o amser, hac a so deuet a c'hinou-ê-c'hinou bedeg ennomp-ny. Qelennadurezou an Ebestel hep scrid.

hag e geriadur «Dictionnaire françois-breton ou françois-celtique du dialecte de Vannes» get l'Armerye (Claude-Vincent Cillart de Kerampoul) hag embannet e 1744 e-lec'h ma vez kavet an termenadur-mañ :

Tradition : Rantereah heu. m. Apostolique, Gùirionné sacrétt deid a veec de veec, ag en Abostolétt bed omp. f.

Evit ar gwiraour e sinifi ar ger an doare da dreuzkas piaou un dra fetis ag ur perc'henn d'egile. Hag e penn kentañ ar XVIIvet kantved e ta ar ger da sinifiñ ar gizioù a za ag an amzer gozh hag a zo treuzkaset en amzer a-vremañ.

Neuze hep treuzkas, *tradition* erbet.

E-barzh geriadur Grégoire Rostrenen e vez kavet an termenadur-mañ :

Tradition : *Livraison*. Livradurez

Tradition, ce que nous avons appris de siècle en siècle. *Qelennadurez a-c'henou-ê-c'henou, hac hep scrid, eveus an amser goz. Desqadurez dre ar c'hléved eveus a draou ne dint bet biscoaz lecquat dre scrid.*

Ar pezh a welomp en termenadur-se eo ar fed ma vez komprenet sklaer get Rostren ar ger *tradition* 'el un treuzkas hag un treuzkas dre gomz hepken.

Tost-tre eo an termenadur e geriadur A. Troude (1886) :

Tradition, s. f. Transmis par la *_, deuet a c'henou da c'henou beteg ann amzer-ma.*

Tradition sacrée, *kelennaduresiou ann ebestel, Gr ; kelennadurez hep skrid a berz ann ebestel ; gwirionez sakr deuet a c'henou da c'henou.*

Kinnig a ran gwelet an doareioù da dreuzkas ar glad dianvezel a c'hell kemer daou hent disheñvel : treuzkas hep cheñch pe treuzkas hag emdroiñ.

A) Temptadur ar fiksadur

Amañ e komzomp a draoù fetis pe difetis a c'hell bout treuzkaset a rummad da rummad hep cheñchamant a-c'houde dekvedoù pe kantvedoù.

Skouerioù a gaver e meur a dachenn : ar geginerezh (rekipe ar c'hrampouezh gwinizh-du e Breizh da skouer) ; an dilhad (ar c'himono e Bro-Japan) ; al labour-douar (feson da droc'hiñ ar gwez àr ar c'hleuzioù e Breizh-izel hag e Breizh-Uhel), ar sonerezh (ar gora e Bro-Mali). Kantadoù a skouerioù a c'hellomp kavet.

Kenderc'hel a ra ar boblañs da implijout un doare d'ober hep digas cheñchamantoù. Koulskoude, pa sellomp a-dost doc'h ar skouerioù a seblant simpl da gavet evit skeudenniñ ar fiksadur e welomp n'eo ket ken anat-se.

Ar c'hrampouezh gwinizh-du a zo fardet atav get bleud gwinizh-du, dour hag holen. Cheñchamant erbet amañ. Mes ne ouiimp biken peseurt blaz o doa ar c'hrampouezh-se daou gantved 'zo, pa ne veze ket c'hoazh lakaet pestisidoù àr ar gwinizh-du ha klor 'barzh an dour. Un efed o deus bet ar cheñchamantoù-se àr blaz ar c'hrampouezh pe get ? Den ne ouio.

Ha kimono an noblañsoù e Bro-Japan en deus emdroet kalz a-hed ar c'hantvedoù. Gwiskamant a vil blez marse mes pinvidikaet get broderezhioù e XVIIIvet kantved, ijinet goude an obi (ar gouriz)... Cheñchamant anv zoken pa oa ar c'himono anvet *kosobe* (a dalv "milginoù strizh") e-raok ma ledanaas ar milginoù.

Memes tra get ar g/kora, benveg sonerezh afrikan a veze graet e gordennoù get boelloù hag a vez sonet bremañ get neud-pesketa e nilon. Ha ne gomzan

ket amañ ag ar sonerezh a vez sonet geti hag he deus emdroet kement ag ar benveg.

Neuze, doc'htu pa vez sellet a-dost e welomp n'int ket ken kozh an traoù na ken difiñv hag ar pezh a soñjemp. Mes perak eo ken diaes d'an traoù chom stabil ? Rak, evel pep tra vev, heuliiñ a reont lezenn an homeostaziezh.

B) Lezenn an homeostaziezh

An homeostaziezh a zo ur ger implijet e penn kentañ e skiantoù biologel evit komz doc'h lusk ar boudoù da stabilaat o c'hoñstantennoù fiziologel tost d'an normal. Dielfennet eo bet e 1920 get Walter Cannon 'el « *The coordinated physiological processes which maintain most of the steady states in the organism* »¹.

Implijet e skiantoù sokial e teskriv klask ar c'hempouez er gevredigezh.

Ha se eo ar pezh a gavomp er skouerioù meneget tuchant. Reolennoù, doareioù d'ober a seblante bout difiñv o deus cheñchet, alies en un doare soutil a-walc'h evit ma ne vehe ket bet remerket betek ar poent ma ya an traoù tost da get. 'El ma skriv Ronan Le Roux : «*On ne se met à penser à l'équilibre qu'à partir du moment où l'on sent qu'il est menacé*»².

Daoust ma n'en deus ket cheñchet rekipe ar c'hempouezh gwinizh-du, n'int ket mui fardet get lard dous (bloneg) mes get amanenn, n'int ket mui poazhet 'barzh an oaled mes àr ar fornigell pe àr ar billig tredan ha farset int bremañ get lan a draoù ha na vehe ket daet 'barzh soñj hor mammoù-guñv : *roquefort*, kregin sant-Jakez, avaloù-douar ha me-oar-me... Ha get ar cheñchamantoù-se e chom bev ar c'hempouezh gwinizh-du.

Hep azasaat ne c'hell ket an traoù kenderc'hel 'el ma oant. A-hent-arall ec'h aont da get, a-wezhoù dousik, a-wezhoù founnapl mes mont a reont da get memes tra.

Sellomp doc'h ar festoù-nnoz. Ma ne vehe ket bet renevezet an doare da vodiñ an dud tro-dro d'an dañs er blezadoù 1950 get Loeiz Roparzh e vehe bet kollet an dañsoù hag ar sonerezh a ya gete.

Kuitomp Breizh evit mont da Lille e-lec'h m'emañ dibunadeg ar poupinelloù ramzel ur fest a-c'houde ar Grenn-Amzer. Setu ar pezh a vez kavet àr lec'hienn goodmorninglille.org : «*Les Géants ont été beaucoup critiqués au fil des ans et leur existence a été menacée à maintes reprises. Trop païens pour faire partie des fêtes religieuses, trop dans le style de l'Ancien Régime*

¹ Adaptive Homeostasis Kelvin J. A. Davies,

² L'homéostasie sociale selon Norbert Wiener, Ronan Le Roux, Dans Revue d'Histoire des Sciences Humaines 2007/1 (n° 16), pages 113 à 135

pour les Révolutionnaires... Mais les Géants se sont adaptés et, année après année, la tradition persiste.»³

«La tradition persiste» pand eo gwir he deus en em azasaet doc’h soñjoù ar gevredigezh. Treuzkaset eo bet ar mennozh ag ar Grenn-amzer betek bremañ mes n’eo nemet ar mennozh zo bet treuzkaset, an doareioù d’ober o deus cheñchet. Ma ne vehe ket bet kaset ar cheñchamantoù-se e vehe aet ar gustum-se da netra.

Ret eo d’an *tradition* emdroiñ evit padout ha, d’an aliesañ, ar pezh a zo treuzkaset n’eo nemet ar soñj, an ide. D’an tu-se e c’hellehemp lâret eo an *tradition* ur roud ag an amzer dremenet en amzer a-vremañ pe kentoc’h ar pezh a ziviz an amzer-a-vremañ mirout ag an amzer dremenet.

A-c’houde 1931 ha geriadur Frañsez Vallée e vez troet ar ger *tradition* e brezhoneg get ar ger *hengoun*. Hag an droidigezh-se a zegas prederiadennoù.

HENGOUN

Krouet eo ar ger *hengoun* get ar rakger *hen* a sinifi kozh hag ar ger *koun* a sinifi memor. Kinniget e voe bet get Frañsez VALLEE en e c’heriadur bras e 1931. Gellout a reomp en em c’houlenn perak n’eo ket bet dibabet ar ger *treuzkas* evit treiñ *tradition* get an Aotrou Vallée? Ha penaos e veze troet ar ger-se e-raok 1931 ?

Gwelet hon eus e geriadurioù Rostren ha Troude ne oa ger erbet e brezhoneg evit treiñ *tradition*. Ret e oa bet dezhe implijout un droadell.

An dibab graet get Frañsez Vallée a zo bet degemeret get ar vrezhonegerion ha dont a ra da vout boutin a-walc’h buan-tre. Ur strollad tud anvet “Kenvreudeur an Hengoun Kelt” er bleadoù 1950, un ti-embann staliet e Pluneret betek 2016 a oa anvet “Hengoun Editions”, ur gevredigezh e Sant-Ave a ra àr-dro dañsoù Breizh a zo anvet «Hengoun Senteve»... Ur ger aes da skriviñ, aes da zistagiñ, aes da zerc’hel soñj. Setu perak en deus graet bec’h marse.

³ <https://www.goodmorninglille.org>

Kozh ha memor, ma heuliomp ster ar ger eo an *hengoun* ar memor kozh neuze. Soñj erbet a dreuzkas amañ, ar pezh a gont eo derc'hel soñj.

Aes eo mirout an traoù fetis hag ar mirdioù a zo o fal dezhe gober an dra-se. Mes ar fed eo aes a-walc'h ne sinifi ket e oa anat. N'eo nemet a-c'houde an azginivelezh en Europa e teuas ar soñj ag ur memor boutin etre an dud. Kantved ar Gouloù e Bro-C'hall eo a welas ar c'hentañ mirdioù. An Dispac'h Bras a voe ur prantad ma oa rannet an dud etre distruj an holl draoù a gase soñj d'ar roueelezh ha d'ar relijion ha mirout ur memor broadel. Bremañ eh omp er memes stad : rannet etre mont àr-raok ha mirout testeni an amzer gozh. Ha pa vez divizet mirout n'eo ket aes atav gober an dibab etre mirout 'el m'emañ pe reneveziñ.

Gwelet a reomp n'eo ket simpl memor an traoù fetis. Diaesoc'h c'hoazh mirout memor an traoù difetis, ar glad dizanvezel 'el ma vez lâret bremañ. Penaos derc'hel soñj ag an holl draoù-se a za ag hon hendadoù : al lennegezh dre gomz, ar sonerezh, an dañs, an arz keginiañ...? Ha perak e vehe a-bouez er virout?

A) Memor an traoù difetis

E-pad pell ne oa nemet an treuzkas a c'helle mirout an traoù-se. Ret e oa kanal, dañsal, soniñ, keginiañ... ha diskouez an traoù-se d'ar vugale, d'ar re yaouank a ziskoueze ar memes traoù, pa oa arru o zro, d'o bugale en ur chadenn difin. Arabat soñjal memes tra o doa an dud ur goustiañs ag ar fed ma oant é treuzkas un dra. Ne oant nemet eh ober a pezh a anavent. Ha gwelet hon eus a-raok penaos e vez distummet an traoù pand int treuzkaset. Cheñchet e vez pozioù ar sonenn, an dañsoù a-stroll a za da vout dañsoù daou-ha-daou, sonet e vez get ur gitar-tredan ha lakaet e vez prun 'barzh farz. Ha c'hoazh, ne gomzan ket a rekipe ur farz lennet en ur gelaouenn vegan e-lec'h ma veze lakaet tofu!

Neuze, gellout a reomp en em c'houlenn peseurt talvoudegezh en deus ar pezh zo treuzkaset ?

Get ar skritur e komañs cheñch an traoù. Skritur pozioù ar sonennoù mes ivez skritur ar sonerezh. Get ar paper e c'heller treuzkas un tamm ag ar sonenn. Mes n'eo nemet un tamm pa vank kalz ag elfennoù : distagadur, anal, modelezh an notennoù... Get an deknologiezh é vont àr-raok e c'hellomp mirout memor an traoù ag an amzerioù kent kalz aresetoc'h. Frañsez Vallée a implijas dija ar sonenroller evit mirout mouezh Marc'harid Fulup e 1900. Aes eo deomp en ober hiniv an deiz pa vez ur sonenroller àr bep smartfon. Neuze muioc'h evit derc'hel soñj a bozioù ar sonenn a ra pand eo gwir e c'hellomp ivez mirout mouezh an den a gan, ar pezh a ro titouroù oc'hpenn deomp àr deisadur ar mouezhioù, an doare da zistagiñ ar soniadoù, al lusk, an tempo...

Goude ar sonenroller eo daet ar c'hamera. Ha muioc'h evit derc'hel soñj a bazioù an dañs a ra ivez pa ro deomp titouroù àr an doare ma vez gwisket an dud, ma vez stummet ar c'helc'h, piv a oa e penn ar chadenn, piv zo chomet en davarn... Aes-tre eo deomp bremañ implijout an ostilh-mañ rak ur c'hamera zo àr bep smartfon ivez.

Derc'hel soñj ha ne oa ket un dra aes gwezharall pa ne veze ket an ostilhoù-se zo daet da vout aes-tre bremañ. N'en deus ket mui dober ag an treuzkas evit ma ne vehe ket mui kollet ar gizioù kozh. Mes da betra e servij mirout an traoù kozh ?

B) Perak derc'hel soñj ?

Ha ma vehe derc'hel soñj hag an amzer gozh hag an doareioù kozh heñvel doc'h beviñ en ur vered ? Perak e vehe ken a-bouez mirout ar glad difetis e-lec'h e laoskiñ da vont da get pa ne gav ket mui e blas e buhez ar boblañs ?

Gellout a reomp soñjal eo pouezus evit anavout ur boblañs just-a-walc'h. Pa vez anavet hec'h istor – hag ar gizioù difetis a zo ul lodenn anezhi – e vez aesoc'h kompren hec'h emdroadur. N'eus den erbet a za a netra. Roet eo bet da bep hani ac'hanomp ur valizennad a gustumoù, gizioù, mod d'ober pe da soñjal. Gellout a reomp en em zizober a dammoù ag ar valizennad-se mes chom a raio bepred ul lodenn ennomp.

Derc'hel soñj a c'hell ivez donet ag ur c'hoant da arrestiñ rod an amzer, da rielliñ an traoù. En ur bed a cheñch buan-tre e c'hell ar memor sikour da gavet ur merk. An hengoun a vehe neuze un tour-tan en ur bed cheñch-dicheñch é prouiñ e c'hell traoù 'zo chom stabil a-hed ar c'hantvedoù.

Ar fed da virout an traoù difetis a bermeta ivez d'o lakaat bev en-dro, d'o adlakaat da vout ul lodenn a vuhez ar boblañs. Traoù zo hag a oa aet da get o deus adkavet buhez diwezhatoc'h. Posubl eo bet rak miret e oa bet memor an traoù-se en ul lec'h bennak. An istor a lak a-wezhoù gizioù en arvar. Skouerioù e-leizh a zo siwazh : an Dispac'h Bras en deus difennet ar gouelioù relijiel e bro-C'hall ; an Talibaned en Afghanistan o doa difennet ar sonerezh e penn-kentañ ar blezadoù 2000, ar pezh emaint eh adober àr-a-seblant... Ur wezh achu get ar galloudoù drastus-se e faot d'ar bobl adkavet red he buhez hag amañ eo a-bouez adkavout roudoù ar glad dianvezel.

A-du-'rall, pand eo gwir eo miret an traoù ha riskl erbet da vont da goll gete, e c'hell izili ar gevredigezh mont dreist d'ar gizioù kozh, torriñ chadenn an doareioù kent evit nevesaat, ijiniñ doareioù nevez ha disheñvel. An troc'h a vehe aesoc'h e kevredigezhioù a vir memor an traoù evit e kevredigezhioù a dreuzkas. Gérard LENCLUD a zispleg : « Puisque dans ces

sociétés⁴ la tradition est précisément consignée, transcrite dans sa lettre, on peut s'en écarter et surtout s'en écarter *délibérément*. »

Sed disoc'h un nebeut « refleksionoù » ha ne ouian ket mard int « profitabl » mes d'an nebeutañ a glask diskoueziñ ar pezh a zo a-dreñv gerioù a vez implijet alies. Muioc'h evit un droidigezh eo ar ger *hengoun*, ur cheñchamant sav-poent eo penn-da benn. Merkiñ a ra mat an tremen etre ur gevredigezh hag a oa troet kalz sevenadur he fobl tu ar gomz hag ur gevredigezh a oa é krog da implijout muioc'h mui ar skrid e digarezioù boutin, ar pezh a c'hoarvezas tamm-ha-tamm etre an XIXvet hag an XXvet kantved. Frañsez Vallée, pa zibabas an droidigezh *hengoun* evit ar ger *tradition* a ziskouezas bout un den ag e amzer en doa intentet cheñchamantoù kevredigezhioù ar c'hornôg.

Myriam GUILLEVIC

Levrlennadurezh berr

BURTIN Jacques, « Histoire de la kora ». <http://www.jacquesburtin.com>

DAVIES Kelvin J. A., « Adaptive Homeostasis », *Molecular Aspects of Medicine*, vol. 49, juin 2016, p. 1-7.

IWAO SEIICHI, IYANAGA TEIZO, ISHII SUSUMU, YOSHIDA SHOICHIRO, FUJIMURA JUN'ICHIRO, FUJIMURA MICHIO, YOSHIKAWA ITSUJI, AKIYAMA TERUKAZU, IYANAGA SHOKICHI, MATSUBARA HIDEICHI, « 677 Kosode », *Dictionnaire historique du Japon*, Tokyo, Publications de la Maison Franco-Japonaise, 1987, vol. 21/13, p.

LE ROUX Ronan, « L'homéostasie sociale selon Norbert Wiener », *Revue d'Histoire des Sciences Humaines*, n° 16, janvier 2007, p. 113-135.

LENCLUD Gérard, « La tradition n'est plus ce qu'elle était... », *Terrain*, n° 9, 19 octobre 1987, p. 110-123.

MONSINJON Eric, « La mémoire à l'œuvre : conserver ou restaurer ? », *L'Éléphant*, Hors-série, novembre 2018.

ONG Walter Jackson, HIESSLER Hélène et HARTLEY John, *Oralité et écriture: la technologie de la parole*, Paris, les Belles lettres, coll. « Graphê », 2014.

POUIVET Roger, « Pourquoi conserver les œuvres d'art et le patrimoine ? », *Nouvelle revue d'esthétique*, n° 21, janvier 2018, p. 109-119.

ROULAND Norbert, « Les talibans et le silence », *La pensée de midi*, vol. 9, n° 3-1, 2002, p. 128-131.

⁴ ar c'hevredigezhioù modern a implij ar skritur

